

Le Tourneur : Person Tonkedeg.
Bet embannet e 1890.

Taolenn
Froudenn
Devez ar mestr-studi

Froudenn

Sotañ den 'zo war an douar
Am-eus gwelet, n'eus ket e bar.
War eun dachenn, digor d'an oll,
E zoñj gonid da hortoz koll
Eun nebeud barzed diwar-dro,
'Zo diskennet gand o gwerzo'.
A-dost, a-bell 'oa sellerien
Tro a dro d'ar hourennerien
Ha peb unan d'e vignoned
A roe 'r maout en e spered.

« Beh d'ar c'hoari ! An oll a lar
Penaoz an taoliou 'zo dispar :
Biskoaz ken koantig abadenn
Ne oe gwelet en on zraouien¹. »
'Vel-se 'lere heb klask troiou
Neb a zelaoue ar gwerzou,
Pa glevis eun azen kornieg.
Braz e zellou ha skouarnieg,
Tad-koz an ezen eo, me 'gred ;
Ez a da vreugi, selaouet :
Pa gomzo galleg e-po mez
D'e vrezonég, taolet evez.
*Unan demeuz ar jouteirien
'N-eus emprunet e livitenn,
Ne gombat ket gand e armo'
Diktet 'vo dezañ e vernio'
Ar jeu eta nan eo ket vra²l
Kar, 'vel ma lerer, fasil e'
A glae peb den goro e zaout
Ha nann êsa laerez ar maout³/*
Setu lavar ma den gouizieg.
Ahanta ! Selaou, genaoueg :
Eur mignon a ra dit kentel,
Dastum anezi 'barz da hodell
A-raog sevel na mouez na penn
Kerz prim d'ar skol da zeski lenn.
E-pad deg vloaz 'tao da heno'
Hag e vi furroh... Kenavo.

Ar maout 'm-eus gwelet n'eus ket pell,
Ha pa 'n-esu klevet ar brezel,
Eñ 'n-eus diskouezet din raktal
Ar herniou savet war e dal.

Maoutig bihan, pa vi 'n ez ment
Bale da gerniou en pep hent,
Ha mar klevez ar genaoueg
Beh d'e gov-karr en brezonég.

Notenn gand "Embann an Hirwaz « : iskiz a-walheo ar skrid-se. An droidigez e galelg a zo disheñvel braz.

¹ on zraouien : or bro.

² vra^l : ?

³ ar maout : **notenn gand an oberour** : Eur maout 'vez roet en Breiz-Izel d'an neb a honez er gourennou.

Devez ar mestr-studi

Ali d'al lenner :

Ar werz galleg, a zo amañ a-geñver, a oa greet er bloaz 1858, en Dinan e leh ma oan Mestr Studi.

Er bloaz 1862, pa oan kure e Tonkedeg, e teuas em fenn, evid deski gwelloh ar brezoneg, dizrei ma gwerz galleg en yez on zud-koz. Deread eo dim karoud an diou yez peogwir int anavezet en Eskopti.

*War veg e deod mui a heriou
A zeu d'an neb a ra gwerziou.*

*

Bim baou ! Bim baou ! Bim baou ! Red eo sevel, paotred ;
War-zao ! Pell a-walh 'zo oh aze o kousked,
Gourvezet 'n ho kwele ne fell ket deoh moarvad
Chom da dibikouzañ, eun eur⁴, ho taoulagad.
Hastet 'ta diblouzañ, rag lagad an Aotrou
Ne vo ket gwall vignon pa deuy d'ober e dro...
Rei 'ran, koulskoude, 'vid dond diwar o hlud,
D'ar skolaerien dieg rabat⁵ a bemp munut ;
Eun all c'hoaz ! ha goude gwaz eo d'ar paourig kêz
N'en-devo ket laket e gorvig war ar mêz.
Setu 'tond ar barner... E dal 'zo ridennet,
Hag en e zoulagad a zo⁶ tan ha luhed ;
Sellet outañ ervad, bremazon e vo beh
Kouezi a ray tro-ha-tro eur grizill bara seh⁷.
Setu euz ma devez ar penn kentañ bemde',
An daou benn 'zo heñvel an eil ouz egile.
Gortozom evelkent, ma c'hwezfe an avel
E teufe skedusoh an heol da zevel.
Mond a ran en eur zal, ar Studi heh ano ;
Eur Studi an dra-mañ ? Ya, eme ho keno' ;
Me 'garfe ho kweled savet 'barz ar gador,
Abred war an tu all ho kenou 've digor :
A-gleiz, a-zehou, dre-oll 'mañ dorn an diegi
O tastum da gousked paotred vad ar Studi,
Hag e lerer Studi !...

Ruziañ 'ran gand ar vez
O weled eru ger kaer mastaret en on zouez.
Me 'gleo an dud varo, dre o skiant brudet,
O krozal er beziou, hag o dremm kounnaret
A lar ar gasoni a verv en o halon...
O malloz a rofent da heveleb laeron
Paneved... Bet⁸ didrouz ; mar deut d'o divunañ⁹
Kalz diêsoh kudenn am-bo da dibunañ...
Petar 'zo ? Me 'gav din, eur morzol, em skouarn,
A sko war an anne da stummañ an houarn.
Pa glevan o zeodou, a-unan dirollet,
O tiskouez gwell-pe-well, int brao distagellet.
Ar vulzun ne red ket euz dorn ar gwiader

⁴ eun eur : eun eurvez.

⁵ rabat : galleg.

⁶ a zo : tregerieg : ez eus.

⁷ eur grizill bara seh. : **notenn gand an oberour** : pinijenn roet er skoliou.

⁸ Bet : bezit.

⁹ d'o divunañ : **notenn gand an oberour** : pinijenn roet er skoliou.

Ken prim hag ar homzou euz genou ar skolaer,
Koumoul a zo en oabl, habdale e strako
Uz 'd'ho penn, kanfarded, mouez skiltr ar huruno'.
Trouz ar brezel n'eo mann e-kichenn o diroll ;
'Hed an amzer, kentoh, m'o harfe kousket oll.

Bim ! baou ! eme ar hloh, deut d'ar porz da hoari,
Ha ma zud d'an daoulamm hep soñjal en o fri.
Med allaz ! ma zelenn a zeu krenn dilavar.
Red eo din 'n eur wezenn he skourrañ ouz eur barr.
Penazo e rin-me 'ta, telennig, ma-unan,
Lar din piou ar gonnar 'zo kirieg, ma 'peus doan.
« Dre bevar horn ar porz gra eun dra, sioulig,
Hag e weli perag e ar din tevel mik. »

Ha me 'vond. Hebdale daou grennbaotr a glevis.
Diwar-benn eun netra e vallozent iskiz.
"Kis, kis", 'me ar re all. Beh 'ta d'an oll taoliou dorn.
Bremañ 'welfom pehini a ranko mond d'e gorn.
Goude kalz a lampou, unan a chom war var,
Reud e gein ; egile, ruz-tan gand ar gonnar,
War an oll zellerien, a hoarze euz e liou,
Hag a-dreuz hag a-hed a sko hep selled piou.

Bremañ e welan sklêr perag ez out tavet
Pa glevez malloziou, da gordenn ne zon ket,
Diskenn prim ha seder, an daou grennbaotr, hirie,,
Peb a damm bara seh a debro da greisteiz.
Deus 'ta war ma halon da stigmañ da gordenn,
Ha me 'gano ganti gwelloh, o ! ma Zelenn.

Na stard az priatan ! Na me 'zo evuruz !
Ma-unan e aon trist, bremañ 'vin dudiu ;
Da gan, 'barz ma halon, a hwezo an elfenn.
Ha gwerzou a rin, c'hoaz, keit 'pado ma froudenn.
Deom eta, er mêziou, da glask eun draoniennig
Ped ar hoad 'leh ma kan da Doue ma eostig.
Eno, pell dez ar drouz, ha tostoh da Doue,
Ni 'unano on mouez gand moueziou an Êle'.
Pell dez an drouz ! Ya da ! Me 'gredfe huñvreal
Ma'h afen ma-unan da vale gand eun all.
Eur wech hepken ar zun, na mui na nebeutoh.
D'ar yaou on digabestr¹⁰, d'eun eru pa zon ar hloh
Ma ne deu d'am fedi da ren ar skolaerien.
Unan ar pennou braz, damantuz d'e grohenn...
Sed-eñ o tond d'ar re, stummet eo e henou
Da baeañ din ma foan gand eun toullad ardou.
Eh an 'ta da vale, pa eo greet ar marhad.
Sellet ozu ma faotred skañv a benn hag a droad.
Gwenn int oll, ma zo den, ha gand kement ezel
D'ober ardou int treh da Vestr *Polichinel*.
Arru ouz toull an nor e fell da beb unan
Bezañ laket da vestr kerkoulz braz ha bihan ;
D'ar hoad, eme unan ! Ya da, 'me egile !
A-gleiz ! Ya ! Nann ! A-zehou !... Ma n'on bouzar gante !
Hag e teufe Doue gand e oll gurunou,
N'oun ket hag-eñ 'vougfe trouz kement a deodou.
Daou he dri m'm-eus krennet, e-touez ar re hirrañ,
Hag a-raog heb lared pe du-hont pe du-mañ,

¹⁰ D'ar yaou on digabestr : en amzer-ze ne veze ket skol d'ar yaou.

Rag m' o lezfen eur wech da gerzed war ma zreid
Abred gante, zoken, n' afen ket keit-ha-keit.
'Vid gwir, n' ouzon ket c'hoaz, e treuzin leuriou kêz.
Peleh 'm-eus c'hoant da vond da dremen ma amzer,
En eun taol em spered zo savet eur gredenn
Na gavjen ket gwelloc'h 'vid manati 'r zodiac.

Tostaad a ra ar houlz da zistrei war on giz.
A-veh gand kalz a boan m' oll deñved a gavis ;
Ha me da faouti hent¹¹, o krozmoli da vad
Eneb ar reder-ze en-deus treñket ma gwad.

Ma spered 'zo a-dreuz abaoe ma on savet
Gand pebez plijadur eh an 'ta da gousked !
Med ma faotred dieg, penn-da-benn 'zo heñvel
Ouz buohig ar paour n' houl gourvez na sevel.
Karoud 'rafent, 'vid kalz, eh afen d'am gwele
Heb ober eun tamm tro d'ou bountañ en o re.
Prim e rank peb unan diwiskañ e zillad,
Rag o ler a baefe, ma vent re diwezad.
Ha ker, pa hen laran ; hast eta, genaoueg,
Ha ma'z-teus a hoant da gleved komzou c'hweg.
O tisklêriañ d'an oll, e vi en pinijenn,
Pa ne blegez ket da benn da zenti d'al lezenn.

Kousket int, maro-mik. O zeod 'zo skuiz moarvad,
Rag anez, kalz aneze a delhje d'hen pilad.
Euz ma devez poaniuz, setu 'r penn diwezañ,
Bremañ 'tennan m'alan evid ar wech kentañ.
A-boan 'vad, eo serret malwenn ma daoualgad,
Ha stanket o genou goude meur a deodad,
D'an eur ma vez ar haz o lared e bater,
'Uz d'am fenn ar razed a ebat er solier.
Kant soudard, o kerzed a-unan 'n eur vandenn
'Zo didrouz e-kichenn ma razed dierhen.
Heb mar, eru habiten 'zo deut a-nevez zo
Da zeski ar brezel da oll razed ar vro ;
C'hoaz muioc'h e plij din-me skolaerien deodeg
'Vid bandenn villiget ar rederien losteg !

¹¹ faouti hent : galleg.